

Palioù Unvaniezh ar Gelennerion Brezhoneg —

- Bezañ ul liamm etre holl zifennerion hor yezh hag hor sevenadur ;
- Efedusaat hag aesaat hol labour, ken war dachenn ar gelennerion hag ar stourm dre vras ;
- Bezañ un talbenn kelennerion prest da zifenn hor gwirioù war an dachenn.

Piv a c'hall bezañ ezel ? —

- Kement hini a gelenn brezhoneg :
- er skolioù-mamm ha kentañ derez ;
 - er skoloù hag al liseoù ;
 - er skolioù-mistri hag er skolioù-meur
- en deskadurezh stad, katolik pe Diwan ;*
- dre lizher hag er c'hentelioù-noz.
- Ar gelennerion na gelennont ket brezhoneg evit c'hoazh :
- m'o deus c'hoant d'en ober un deiz bennak ;
 - m'o deus c'hoant da gelenn o danvez e brezhoneg.

Peseurt tachennoù labour ha stourm ? —

- an niver a eurvezhioù brezhoneg ;
- plas hor yezh e implij-amzer ar skolidi, ar gelennerion ;
- ar gwir da bep skoliad, skolajad, lisead pe studier da zibab brezhoneg da zanvez-studi pe da zanvez-arnodenn ;
- ar postoù kelennerion da grouiñ ;
- an arnodennoù hag an diplomoù ;
- kudennoù pleustrek al labour (dafar) ;
- ar stummañ-mistri.

Penaos e vez kaset an traoù war-raok ganimp ?

- ⇒ dre an darempredoù gant kargidi ar velestradurezh ;
- ⇒ dre bouezañ war an dilennidi (kannaded ha pennoù-bras) ;
- ⇒ dre gelaouiñ ar gelennerion diwar-benn o gwirioù ha stad ar brezhoneg ;
- ⇒ dre embann pennadoù ha mennadoù ;
- ⇒ dre vanifestiñ, harz-labour...

- Kenlabourat a ra UGB gant kement kevredigezh a zifenn hor yezh : strolladoù sevenadurel (KEAV, Skol an Emsav, Dastum...), kevredigezhioù kerent (Div Yezh, Dihun, Diwan...), studierion, sindikadoù, aozadurioù etrevroadel (The European Bureau for Lesser Used Languages, The International Committee for the Defence of the Breton Language...)
- Ezel eo UGB eus KSB, Breizh Unvan (Bretagne Réunion), Emglev Bro Douarnenez, Al Levrig, Startijenn Bro Vigoudenn, Ti ar Vro Kemper, Ti ar Vro Bro-Leon.

Digor eo UGB d'an holl gelennerion, ha n'eo-hi stag ouzh strollad politikel ebet.

Skodenn-vloaz UGB - Skeul (en €)		
	< 10 vl. micher	> 10 vl. micher
Izili a enor	0	0
Live 1 : kelennerion		
o eilerion	15	—
o ar skolioù, 1 ^{añ} bloavezh (PE1)	15	—
o ar skoloù, al liseoù (PLC1)	15	—
o ar c'hentelioù noz/dre lizher	15	—
Live 2 : kelennerion		
o ar skolioù, 2 ^a bloavezh (PE2)	22,5	—
o ar skoloù, al liseoù (PLC2)	22,5	—
o skolaerion	22,5	30
Live 3 : kelennerion		
o ar skolioù titlet	30	37,5
o ar skoloù, al liseoù titlet (AE, PEGC, kapesidi)	30	37,5
Live 4 : kelennerion		
o skolveurieged	37,5	45
o ar skolioù-meur titlet	37,5	45
Izili vadoberourion	45	
Skodenn skoazell : 7,5 € ouzhpenn ar skodenn diazez.		

Yalc'hadoù KSDS

- Kinnig a ra KSDS (Kreizenn Stummañ an Danvez-Skolaerion) :
- *yalc'hadoù stummadur dibaouez* evit an holl gelennerion ha danvez-kelennerion bet o heuliañ ur staj brezhoneg ur sizhunvezh (30 eurvezh d'an nebeutañ) war o c'houst ha war o amzer vak ;
 - *yalc'hadoù stummañ* evit an danvez-kelennerion brezhoneg enskrivet en ESSM, e CFP Diwan pe gatolik, en Stumdi, e Diplom Skol-Veur war ar c'helenn divyezhek en UCO.

**Goulennit fitouroù digant KSDS,
72 str. Texier La Houle, 56000 Gwened.**

**LAKAIT HOC'H ANV
Bloavezh-skol 2008- 2009**

Da gas da Stefan Alliot, Ar Biladenn, 22740 Planiel, asambles gant ho chekenn. Trugarez deoc'h !

Anv bihan - Anv-familh : _____

Chomlec'h : _____

Nⁿⁿ pellgomz : _____

A-bouez bras eo reiñ ho postel dimp. Gantañ e c'hallfomp kas keloù deoc'h. Gall' a refet ivez kemer perzh e-barzh sevel hon zeuliaoueg kelenn.

Postel : _____

Lakait ur groaz er c'hombodoù mat :

1. Kelenner(ez) Kelenner(ez)
- skol-vamm skol gentañ
- skolaj lise
- kreizenn-stummañ skol-veur
- danvez : _____
- divyezhek unyezhek
- war ma leve

2. Skol stad Skol gatolik Skol Diwan

Skrivit amañ-dindan, mar plij, anv ha chomlec'h ar skol(ioù) oc'h stag outi(oute) :

3. Skol dre lizher Skol noz
 Stajoù

Skrivit amañ-dindan, mar plij, anv ha chomlec'h ar gevredigezh :


4. Micher all, peseurt hini ? _____

Diplomoù brezhoneg : _____

Rummad kelennerion : _____

(Sindikad : _____)

- Skodenn diazez (s.o. an daolenn en tu all)
 Skodenn skoazell (s.o. an daolenn en tu all)

 **Talvezout a ray ar skodenn-mañ evit ar bloavezh-skol 2008-2009**

D'an ____ / ____ / ____, e _____

Sinadur :



UGBREZHONEG.COM

Teuliaoueg UGB

- Berniet ho peus un toullad fichenoù kelenn e brezhoneg ?
- C'hoant ho pije da zisklêriañ un nebeud mennozhioù deuet deoc'h diwar ho skiant-prenet war ar vicher ?
- Lennet ho peus AL LEVR en deus roet sklêrijenn deoc'h war ar gelenneriezh ?

Poent bras eo deoc'h soñjal kelaouiñ ho kevelerion o kregiñ gant ar vicher pe get.

Kavout a refet keleier ouzhpenn war hon lec'hienn : festenoù ofisiel, stadegoù, pennadoù preder war ar vicher, ha c'hoazh...

Teuliaoueg kelenneriezh UGB, a zo ul liamm etre an holl gelennerion ha skolaerion c'hoant gante **eskemm** war ho skiant-prenet.

Teuliaoueg kelenneriezh UGB, pe an doare da **c'hounit amzer** evit kelenn a-vod, kendalc'her d'en em stummañ pe... mont en darempred gant ar gelennerion all...

Gall' a rit koumanantiñ d'al **lanv RSS kelenn**.

Stourm UGB

Kavet a refet :

- keleier a bep seurt diwar-benn ar c'heleenn brezhoneg...
- keleier a bep seurt diwar-benn ar pezh a reomp evit kas ar c'heleenn brezhonek war-raok.

Koumanantiñ d'al **lanv RSS keleier** evit bezañ ganti !

KANN@DEL

Embannet e vo div wezh ar bloaz ha kaset dre bostel deoc'h. Muioc'h a geleier a gavfet avat war al lec'hienn.

DESKIÑ

Ur gelaouenn gelenneriezh a veze embannet div wezh ar bloaz. Kit war al lec'hienn da welet peseurt niverenoù a zo.

Gallout a rit prenañ anezhe gant ur chekenn war anv UGB digant :

Stefan Alliot, Ar Biladenn, 22740 Planiel



U N V A N I E Z H
 A R G E L E N N E R I O N
 B R E Z H O N E G

2008

2009

2, hent Kreiz ar Vourc'h

29270 Sant-Hern